

# Gerioù ar vuhez

**RKB**

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

## PREÑV

### Ur preñv, preñved

Un anv kozh-tre an hini eo. Kavet e vez e yezhoù keltiek all, prev e kerneveureg ha pryf e kembraeg

Ur ster ledan a-walc'h en deus ar ger **preñv**. Implijet e vez evit envel ur bern loened bihan. **Preñved** = la vermine e galleg

« Un taol skorn 'vez mat da lazhañ preñved »



[http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennaou\\_krouet\\_gant\\_Malo\\_Ar\\_Menn](http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennaou_krouet_gant_Malo_Ar_Menn)

Savet eo ar ger **amprevan** diwar ar ger **preñv** :

Un amprevan  
Amprevaned




Ledanoc'h eo e ster evit e galleg (lakaet e vez ar c'helien e-barzh rummad an amprevaned da skouer)

Un amprevan a c'hell bezañ ur gunujenn ivez

Arouez ar marv eo ar preñved. Gwechall e veze lâret e oa seblant ar marv pa vezent klevet o tebriñ koadaj an ti da noz.

**Preñvadur**, seurt brenn-heskenn a ta 'maez deus ar c'hoad pa vez preñved e-barzh

« Ar re-se zo tost evel preñved », « Ar re-se zo preñved », evit komz deus tud pizh, tud kras



**Preñv blevek** = biskoulenn

**Ar preñv-dilhad** a ra toulloù e-barzh an dilhad

**Preñv-douar** = buzbug



**Ar preñv-du** a vez kavet e-mesk an traezh war an oad

**Ar preñv-fank** a vez kavet e-mesk ar pri

**Ar preñv-glas** pe **preñv-kaol** a vez kavet e-barzh al legumaj

**Ar preñv-lugern**, **preñv-tan**, **preñv-noz**, **preñv-gouloù** a vez gwelet o lugerniñ da noz

**Ar preñv-seiz** pe **preñv seizennek** evit ober seiz

**Preñvadurezh**,  
disevel preñved

**Preñveta**,  
chaseal ar preñved

**Dibreñvedañ**,  
lazhañ ar preñved



COPINANCÉ PAR  
UNION EUROPÉENNE  
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage  
en Bretagne / Avec le Fonds européens  
de développement régional